

220

Sillaouet hag e kleffot hag e kleffot kana  
Eur sonn a zo kompozet a neve ar flo[er] man.

(f° 36)

A zo gret da Charlez Vinou a zo lesanvet Kojou.  
A zo ed da barez Irvouan eun neubeudik amzer zo.

Eun devez gant konjez e vest eo bet ed deun linadek  
Kasset daou pe tri all gantan da ranvad e voant laket.

Koujou dre ma voa den badin e deus pariet oute  
en divije beb a bok digant pepini a ne.

Oll ma harient gantan nikun en deus refuset  
Nemet ounont merc'h ar meliner onez biken ne roje.

Possub e ta melinerez e deufez dam refus  
A te houd certenamant on prest da honid ma fari.

Evid oc'h da vea melinerez ne doc'h ket a kalite  
Ar re al tout e deuz roet a c'houi a roio ive.

Mond Kojou a lamet gati, a freza e davanher,  
Ar hi a sevel ac'hane a mond fachet bras dar ger.

Pa erruas er ger voa e breur gant e labour  
Hag hi e hober fos klemou  
De breur dimeus a Kojou.

Kement a eure a klemou de vreur dimeus a Kojou  
er fin a brometas dezi e lamfe e vue digantan.

En (1) distro deus al linadek e bed attaket gantan  
Hag e vue sertenamant neket lamet digantan

(f° 37-38)

Pas de titre. A la table: Kojou lazet.  
(1). - Le folio 37 est chiffré: 37-38.

Antronoz vintin pa savas e bed ed da Lannion  
Da lakat e neun voada a refreski e galon.

An distro deus ahane, e bed attaket gantan  
Haq e vuez sertenamant a zo lamet digant-an.

En tre kroas sant ar Valanek ag ive ar Velin Neve  
E klevet ar por-keq Kojou e krial fors e vue.

Seit a balamour da petra e rank Kojou kol e vue,  
Divar ben pokad deur plac'h iaouank ebars en eun assemble.

Entre o divrac'h gvir mam Doue, me rekomand va ene.

Na pa ia ar velinerez dar sul dar pardonniou  
E lavar ar potret iaouank ay eil de quile a ne :

List ar plac'h se da passeal, pe e kolimp or bue.

Janneton Charles, 10 fev: 1851.